

# KIMIADOU EUR MARTOLOD A VREIZ

## CHANSON NEVEZ

Var ton : *An drouc-hirnes, (le mal du pays). Cetu ar fik a fok.*

Bretonet, me o ped, didostet da glevet  
Eur himiad truzus, eun adieu trist meurbet  
A ra de guenvrois, quen monet d'ar brezel  
Eur martolod yaouanq maquet en Breiz-Izel.  
An eis-varnuguent a viz maë me oa en faction  
Oar bont ma batimant, bars er rad, en Toulon,  
O hortos partia vit mont d'an Itali ;  
Oar ben tri de goude, e cleemp ambarqui.  
Me gred a oa tremenet an eur hanter noz  
A ma c'hamaradet oa et da repos ;  
Netra na drouble neuse ar silanç deus an noz  
Met ar mor e vurmuri gant eur vouez rust a gros.  
Ma daou zorn a oa harpet oar ma c'harabinen :  
Dindan ma sreid ar mor bras hag an env us d'am fen.  
Heusi ran, mignonet, pa deuan da gompren  
Nave tra'nden hag ar maro nemet treus eur planquen.  
Pa n'em velis ma unan oar bont ma batimant,  
Ep test deus ma glac'har, nemet ar firmamant,  
Me gommances hirvoudi gant glahar hag anquen  
Pa deuas da jong din da baros Trabrien.  
Ma daoulagat oa troet oar zu ar vilagen  
Lec'h a ma da guenta guelet ar sclerigen ;  
A pa deus da sonjal em herent hag em bro  
Gant an dour deus ar mor n'em vesque ma daëro.  
Abaue an devez fatal a meus renquet quital,  
A dont da guimiadi deus ma mam a ma zad,  
Bep nos, pa ven cousquet, em hunve o goëlan,  
Hag o jonjal 'no glac'har, nos a de a goëlan  
O devez leun a c'hlahar, o disesper c'hoëro,  
O devez deplorabl ha carguet a canvio,  
O quimiad anquinius a glac'harus meurbet  
Me mo jong abanout queit a vin oar ar bed.  
Gant ma herent, er guer, e ma nec'hamant  
Hi a ra ma oll chagrin a ma brassa tourmant  
Penez annongi de han breman d'ar brezel  
Aoun meus d'o lacat gant an nec'h da vervel.  
Pa glevont quement se a devont calonad  
Goasoc'h vit an devez a renquis o huitat  
Hag hi devo courag a oalh vit gallout supporti  
Ep ma ranno o halon gant eur c'helo quen cri.



Houi sperejo evurus, o sãnt a sãnteset,  
Itron-Varia - Drue, ma guir vam hiniguet,  
Reit de ners a courag en o affliction,  
Reit de o hassistañç, confortet o halon.

Pelec'h eo et breman querent a mignonet,  
An amzer-se quen douç hac agreabl meurbet  
Pelec'h ma et breman an amzer eürus-se  
A oan en Trabrien a no toesq bemde.

Niget e pel d'ouzin an amzer quen eürus  
A oan sambles guenac'h, camaradet joaüs  
Tremenet e vidon, marteze vit james,  
Ar bonheur hag ar joa m'em tanvet assambles.

Pa zeï an nevez amser da gargan adare  
Ar guez a vlenio caër hag a selio neve,  
Pa zeui e oar e his ar guenidel er vro  
Na nimp muin assembles beb sul dar pardonio.

Pa oan en o touez oan joaüs a laouën,  
Mes breman on mantret, sionas ! gant an anquen,  
A ma oll slijadur so bout neur plaç disro,  
O sonjal gant glahar, em herent hag em bro.

Houi a velle breman Yvonie o mignon.  
O pourmen e hunan oar ar rad, en Toulon,  
O pourmen e unan, alies tal an nod  
A daëro e zaoulagad a red var e zion chod.

Me ve c'hoas alies aseet oar eur roc'hel,  
Ma daoulagat troet evar zu Breiz-Izel,  
Mantret gant ar glac'har a beuet em daëro,  
O sonjal em herent so er guer en canvo.  
O douar a Vreiz-Izel, o ma bro biniguet,  
Pegouls a sono an eur ma c'hin c'hoas d'ho kuelel ?  
Pegouls a erruo ar momet hag an de  
A zeuio da laquat fia d'am c'haptivite ?

O devez leun a zouster, devez a eorustet !  
Me so chonjal ennout beb heur a beb momet ;  
Doue trugarezus, hastet ar momet-se  
Ma c'hin c'hoas da velet ma bro a ma c'hontre.  
Tre ma oan o teplori oar bout ma batimant,  
Ar loar a darsas souden ebars ar firmamant ;  
Neuse me a velas us d'am fen o nijel  
Eur guénidel bian evar zu Breis-Izel.

O ! prest din me, eonic, prest din da zivesquel  
ma ningin en ez plaç da bete Breis-Izel,

Da gonsoli ma herent quent vit quitat ar Franç;  
A da gas petec eno comsou a esperanç.

Mes allas ! me n'allan quet veldout treuzi an ær,  
Me a renç chom aman evel eur prisonnier,  
Evel a oa guechal an Israëlitet,  
Pel amzer o hortos an douar prometet.

Marteze teus, eonic, scuiset da zivesquel,  
O nijel dreus d'ar mor, o tont deus eur vro bel ;  
Pleg eta da esquel a so bet pel digor,  
A repos eur momad en quichen map Arvor.

Disquen eta, eonic, eur momet em c'hichen,  
Ma scrivin eur lizer da gass da Drabrien ;  
A pa meus quet veldout ar bonheur dont d'ar guer,  
Te vo da viana vidou eur messenger.

Querquent evel ma vi digaoet en Breiz-Izel,  
Te vo, eonic bian, ma messenger fidel ;  
Te rei ma gourhemen er guer pa errui,  
Hag a laro d'am zud a c'han d'an Itali.

Grit ma gourc'hemeno d'an tad neuz ma maguet,  
Mæs allas ! da mam baour, da honer pa ri quet,  
Rag bæ zon partiet demeus a Vreiz-Izel ;  
Eouet da jouissa deus ar gloar eteroel.

Lar adieu d'am breudeur a d'am c'hoarezet,  
Goude d'ar belec coz a neveys ma badeet,  
Na ancoue hini bet demeus ma migoonet,  
A lar de a sonjan enno en peb momet.

Lar de, eonic biau, pedi vidon bep nos  
An Itron Varia, patronez ma faros,  
Ma teui d'am preservi en creis an dangerio,  
A ma rañ din ar c'hras da retorn c'hoas d'am bro.

Mar a teufe dit c'hoas, pa vi en Breiz-Izel,  
Rancontri eun devez ma mignones fidel,  
Lar deñ a fo guelet Yvonic e mignon,  
Hober gard, eun nosves, oar e lest, en Toulon.

Assur dezi er fad, dre broposiou touchant,  
Meus bepret eviti eur garante ardant ;  
Lar deñ a ba brema ma c'horf d'an Itali,  
Mæs ma c'halon a vo da virviquea ganti.

Pa zeñ an neves amser, te a iel alies  
Da gana, da fredoni, da guichen hi frenes ;  
Perac ne allan me nijel eur vech guenoc'h  
A mont de saludi beteg e zi vel doc'h.

Mes gra ebars em flaç, a lar dei dre da son  
Derc'hel jonch da viquen demeus e guir mignon,  
Pec'hini zo, allas ! pell deus a Vreiz-Izel,  
En eur lest, oar mor, foetet gant an avel.  
Pa viu en Itali, en creis ar c'hombajo,  
Creis an tao, ar mitrail a cros ar c'hanonio,  
Neuse eo a tevio ar muian da jonch din  
Deus an amzer eurus so nijet pell d'ouzin.  
Mar teu din da vout tiet gant eur boulet traitoar,  
Hag achui ma deio en eur vro estranjour,  
Neur gouean d'an douar c'hoas keot evit mervel  
Ma daoulagat a droo evar zu Breiz-Izel ;  
Ma daoulagad a droo evar zu Breiz-Izel,  
Da laret d'am c'herent e adieu eteruel,  
Da laret d'am mignonet an adieu diveza,  
A quen ar bonheur d'en em velet bars ar joa.  
Mar a velfit eun de, neur len ar gazeto,  
Ma hmo, sionas dia, oar bultin ar maro,  
Querent a mignonet, c'hui laro gant glac'har :  
Graç dean digant Doue da repos bars er gloar.  
Quent evit finissa goulomp digant Doue,  
Vit ar martolod quez, bep sort prosperite ;  
Pedomp a vir galon Roue an armeio  
D'en preservi en creis quement a dangerio.  
Ofromp c'hoas on veuio da Stereden ar mor  
Vit an oll soudardet deus on bro gær Arvor ;  
Goulomp gant confianç, pedomp hi gant ferveur  
Da bellat dioute peb goal chanç a goal heur.  
Rentomp meulediguez da arme gær ar Franç,  
D'hou prinç quen generus a leun deus a vaillanç,  
Pere guita o bro vit mont da gombati,  
Evit independanç oll bopl au Itali.  
Canomp breman n'eur vouez, canomp tout assambles  
Ra vezint enoret a meulet da james :  
Canomp ta, Bretonet, deus fous on c'halon,  
Gloar ac enor d'hon arme ! viv Napoleon !  
Neb a neus composet ar son ma pen da ben  
So ganet a maguet en paros Trabrien,  
A neuz he c'homposet oar an ton di c'hona,  
Canit-hi ta, Bretonet, vit n'em divertissa.